

An differanç eus ar Garante da hini ar Briedeloç.

(487, suite)

Var an ton gallec : kistelfis, dans mon jeune âge.

Goechal, pa voan-me yaouancic, me voa leun a zezirion,
Hac a lare en ur menach e vije plijadurioù;
Chanchet meus bremâ a langach, ha me meus prouvet d'am zro,
Penos anter-nos an eured ar garante so maro. (bis.)

Gant Ervoan me a voa caret aroc ma voamp priejou,
Hac aboue ma zomp unisset, ne n'on gen en e zonzou:
Gent na voa nemet compleanç, comzou douç ha graciüs,
Bremâ neus nemet neprisanç, goal humor pe zellou tieuz.

(488)

Goechal demeus va c'hapriçou na grede get murmuri,
Elec'h bremâ e voassa viçou a rencan da zuporti;
Goechal e voan e rouanes var e galon, dre e fe,
Hac aboe ma zomp unisset e zeo va mestr, va roue.

D'am mam e rê politessou cant quech an deiz e peb feçon
Ec'h angaji dre garessou d'unissa hon diou galon;
Elec'h bremân e c'hourdrous bepret, hac en despit d'am c'homzou,
Ar bed oll en eus accuset d'or beza grêt priejou.

Plac'h yaouanc en c'have goel goant, greg emeus an oll collet,
Ha gouscoude va mizjillour a lar din non get chanchet;
Petra rin-me? Gout a ouzon, en Paris hac en peb bro,
Penos antronos an eured ar garante zo maro.

(Vol. II, p. 487-488.)
5 str. numérotées.